

RELATION

Veritabl ha profitabl evit an oll dū ober reparation da Zoue demeus ar sacrilejou ha profanationou a gōumeter a enep e Vajeste, abalamour d'ar c'hrimou cometet er lioa-mā, gant pēvar den maleürus e parres Sant-Georch, tost d'ar guær a Libourn, en Escopti Bourdel.

V. ton : Cantic an Eternite.

EN hano Doue, christenien, tostaît da glévet
Maleuriou ar re vrassa a zo bet c'hoarvezet
Gant pēvar den dirollet, coumetet er bloa-mā;
Lacat a reont an eē, an douar da grena.

Qent commasy et rouennan pardon digant Doue,
Eus ar Verc'hez glorijs, ar Zent hac an Aelie,
Gant aoun rac justic Doue na zeue d'am punissa,
Va c'halon ouz e gompreñ a zeu d'en em ranna.

Ennec'h, ô Mam druezus, e lacàn va esperanç.
Evit ma em bezo digant Doue assistanç,
Ma ellin dre ho sicour cavet ar sclérijen
Da explica qement-mā etouez ar gristenien.

Mont a ràn da gommanç discleria en antier,
Pa ro din assistanç va Doue, hor Zalver,
Ar maleuriou éruet en escopti Bourdel,
En parros eus a Sant-Georch, an uguent a ebrel.

Er barros-se a voa eur Person, eun den santel,
A asiste ar beorien gant eur galon fidel,
Dre ma voa carguet ar vrô a guernez ha mizer,
E soulaje ar paour balamour d'hor Zalver.

Pêvar den maleürus , goude dêbri o danve ,
Renoncer da Jesus, abandonet o ene ;
Evit servicha Satan leun a fallagriez
A lacas en o speret da vonet da laërez.

Ar pêvar brigant-mâ a goncluas neuze
Dont da dy ar Person, pa vouient an doare :
Gantân ema an alc'hoesiou demeus ar sacristiri,
Ha ni yélo en nôs da laërez an Ilis.

Clêvit pebes ardou o deveus invantet,
Abers an drouc-speret evit na vint qet anavezet,
Mont da brena cos dillat, en em güisca en peuvien ,
Ha mont da dy ar Person da c'houlen an aluzen.

Ar Person carantezus o recevas neuze
Evel memprou da Jesus, en e dy gant carante,
A roas dezo da goania, iveau en deus o lojet,
Hep consideri ar zònj eus an dud milliguet.

Onz-en em gonclu, hep sónja d'ar repos,
Beuze int bet savet var dro an anter-nôs ;
Forcet o deus ar gampr elec'h edoa ar mevel,
Hac o deus-én massacret eus a doliou contel.

Neuze teujont d'ar plac'h coussqet en e güele,
O deveus-hi massacret hep cavet outi true,
Beuzet en e goad, astennet var leur an ty,
Ha laqet en eur bern hac ar mevel hac hy.

Neuze o deveus pignet ebars gampr ar Person ,
O deveus-én garrotet hep caout compassion,
Staguet en eur gador, hac e dreid en tân,
Laëret an alc'hoesiou qemeret digantân.

Ha p'o deus bet laëret an oll arc'hantiri,
Ar pêvar den maleürus a yas d'ar sacristiri :
Croasiou arc'hant, lampr, calizr, ezençouerou ,
Chapou hac ornamanchou eus an oll auteriou.

Ar pêvar den maleürus gant an diaoul possedet,
A yas da attaqi Jesus en tabernacl beniguet,
Ar soleil hac ar ciboar o deveus qemeret,
An hostiou adorabl o deveus profanet.

Gouelomp oll tud devot pere a gar Jesus,
O velet eun torfet cruel ha maleürus,
Peheni a laqa an eê, an douar da grena,
Sclaci a ra va goad, n'ellân mui explica.

Crena a ra va c'halon o velet an dud maleürus
O foul gant o zreid corf santel va Jesus;
Ne oun penos Doue na zeu d'o funissa,
Pe digueri an douar evit crenn o lònca.

Holla ! tud maleürus, bourrevien arrajet,
Petra rit da gorf Jesus en deveus ho crouet?
Goassoc'h oc'h eguet Judas pehini zo daonet,
Da attaqi var e dron hòr Zalver beniguet.

Retorn a ra bremâ ar pêvar den cruel
Da zisqüez d'ar Person an ornamanchou santel;
En instant ma o güelas e rannas e galon,
Ma commenças da ober dezo instruction.

An den zantel afflijet a lavaras deze :
Pa noc'h eus aoun razòn, bet ouz justic Doue.
An arrach en ho c'halon a zo bet antreet,
Hac unan gant eur gontel ea deus-én dibennet.

E benn zantel hac e gorf o deveus bet tolet
Ebars en eun tân bras evit beza dévet,
O sònjal penos biqen na vijent dizoloet :
E vontr aour, hac e arc'hant o deveus bet laëret.

Mes Doue, ouz pehini ne zeus netra cuzet,
A bermetas ma vije o c'hrimou anavezet,
Ma teuas eus ar barres daou den en eun instant,
Da glasq an Autrou Person da gaç ar Sacramant.

An dud-mà pa veljont an dorojou digoret,
Hac an ty leun a c'hoad, o c'halon zo rannet ;
Mont a rejont da avertissa an oll amezeyen,
Ma teuas gante assembles vardro daou-uguent den.

Pa antrejont en ty o c'halon zo rannet
O velet an tân bras pini a voa allumet,
Hac ar Person en e greiz a voa cazi dêvet.
Hac ar plac'h hac ar mevel en o goad astennet.

Garrotet e voent neuze hep caout compassion ,
Cunduet da Libourn ha lajet er prison ;
Aben seitec dez goude o froces zo jujet,
Dre arrêt ar parlament da veza punisset.


Condaonet voant neuze gant parlament Bourdel
Da gaout ar guistion evit o c'hrimou cruel ;
Rostet betec o daoulin, truez voa o c'hlêvet ,
O crial, o vouela, oc'h anzao e zorfet.

Neuze e voent condaonet ar pêvar den mizerabl ,
Gant torchou alumet da ober amand enorabl ;
Gant eun durqes o ivinou dezo a voe tennet ,
Ha troc'het o biziet, truez voa o c'hlêvet .

Neuze var ar blacen e voent bet cunduet ,
Lajet en ho c'herc'hen peb a rochet souffret ,
Lajet e pêvar dân evit beza dêvet ,
Hac al ludu anezo gant an avel güentet .

C'houi, tadou ha mamou o deveus bugale ,
Desquet-o da veva e carante Doue ,
Evit goude ar maro ma zeot da repos
Gant ar Zent hac an Æles e gloar ar Barados .





CANTIC SPIRITUEL

Var sujet apparition ar VERC'HEZ en Escopti a Artois, an devez qenta a vis even er bлоa 1786.

Var ton : Güerz Sant Ugen.

Meulet ra vezo an Drinded, Tad, Mab h Speret-Santel,
Ha c'houi ive, Guerc'hez fidel, pa oc'h eus en em
apparisset

C'hoas etouez ar gristenien, evit gallout o zouten.

Aboe m'oc'h eus ganetho mab ebarseur c'hraou dister,
Biscoas den en nep carter n'en devoe an enor d'ho quielet
Nemet er bлоa-mà eürus oc'h n'em disquiezet, Mam Jesus.

Didostait amà, christenien c'houi tud devot da Vari,
Da renta ho meuleud ar güir Rouanez souveren,
En escopti a Artois e deveus laqet calz a joa.

Er vilajen eus a Moutier, eun den honest meurbet,
Pinvidic-bras en effet, pehini a gare Doue,
E joa voa da soulaji ar beorien en o annui.

Seulvui ma ro an aluzen, seulvui e cresq e zanve;
Benediction Doue a zo varnezàn a dra certen,
Pa soulaje ar memprou eus a Jesus, hon Autrou.

An den-mà, en devoa pedet qerent hac amezeyen,
An deiz qenta a even da zont da ober eur banquet
Eus eur c'hontrat en devoa da zemezi eur mab dezâ.

Pa edo ar gompagnunez tout ouz tol o coania,
E teuas da c'houlen loja hor Mam beniguet ar Verc'hez,
Hep beza auavezet, rac paour bras e voa güisqet.

Etre e divrec'h e tougue oll joaüstet an Æles ;
Silvidiguez ar bed-oli, Jesus-Christ güir vab da Zoue,
Gant eur visach caér ha charmant, ha paour bras
e viscament.

En istant m'e deus goulennet digant ar mestr eus an ty,
Va lojit, me o suppli, evit eun nôs, ma permetet,
Elec'h ma vo ho polonte : paët e viot gant Doue.

An den-mâ leun a garante en andret ar beorien guèz,
En deus lavaret d'ar Verc'hez : ia, hep ma e aneye,
Ia, emezàn, deut en ty, m'ho lojo ho mab ha c'houi.

Dre an dorn en d'oa-y qemeret ha laqet da azea,
E unan a guemeras Jesus, hor Zalver beniguet,
D'e laqat var e varlen ; hemà'n enor, christenien !

Sulvui masell ar c'hrouadur, sulvuicaëroc'h erc'have,
Ravisset voa e ene, e galon zo en plijadur,
Ouz er güelet quer charmant, quer caër, ha quer ravissant.

E unan en deveus-y pedet : débrit iveau, emezàn ;
Mes hy eu trugareca, ne devoa na naon na sec'het,
Mes calz a blijadur o velet ar gompagninez.

Pa voe ar repas échuet, e c'heulennas diganti :
Lavarit, me ho suppli, a belec'h oc'h, mar permetet,
Ha pez hano hoc'h hanvet, iveau da belec'h e zet.

A noblanç vrásoun, emezi guinidic en Galilee,
Evit lavarat güirione, a dra zur oun hanvet Mari,
Hac e zòn deut gant va Mab da zigaç eur c'hêlou mad.

Eur mignon a meus emezi, a dle caout eun heritach,
Ha c'hoas iveau davantach, ar propriete demeus e dy,
Pa zeo bet trugarezus en andret memprou Jesus.

Ar re-ze o deus pedet ha gounezet evitâ
An heritach ar c'haera pehini a dle da gavet ;
Qent m'achuo an eiz de ; sònxit mad e qementse.

An den-mâ hep bea sònjet neuze bars er recit-se,
Qer profitabl d'e ene, outi en deveus goulennet
Ha bras voa ar baourente dre ar vro ma tremene.

Peguement benac, emezi, e zeo fachet hon Doue
Ouz ar pec'her, nôs ha de ne ra nemet e offanci,
Eo prest c'hoas da rîi pardon, ma er goulent a galon.

E bouvoar hac e vadelez zo en tu-all d'ar valic,
Mar meritomp ar suppliq, e ma c'hoas leun a vadelez,
Ne vanq qet da fournissa peadra evit e veva.

Ar gurun en deus gourdrouzet ha revinet ho tier,
Ar grizil hac an avel o deus iffamet ar c'hartier,
Ar glo hac an dour quer bras n'oe güelet ennàm biscoas.

Eun nombr bras a vatimanchou a zo collet dre ar mòr,
Hep gallout en em zicour, ar maro subit a veler
O caç hoc'h amezeyen d'an douar a dra certen.

En eur guér, brezel ha quernez a veler dre ar c'hartier,
Hac ive qement maleur pere éru gant ar pec'her,
Zo avertissamanchou a éru abers hon Autrou.

Mesva mignon, m'o suppli, dalc'hitsónjeuz va c'homzou
Ne dint qet faribolennou pere a elfet da ziferi,
Gant Doue int lavaret da ziscléria var ar bed.

Teir bloavez ho po assuret en abondanç eus a bep traou,
Qement... ret da veva, an oii a vo rejouisset ;
Güinis, segal ha pep had, tout e vezo marc'hat mad.

Qement a vezo o commerci a vezo oll rejouisset,
O velet ané calonec, hep tristidiguez nac noui ;
Ebars e rouantelez Franç et vezo rejouisanç.

Eun abondanç a faveuriou a zisqenno eus an eë ;
En m'rejouissomp, hirie, Doue a royo deomp e c'hraçou.
Go'len... ountan pardon, ha pedit-én a galon.

Ne guemerit qet va c'homzou vit fablennou mar querit,
Quer güir e meus lavaret, evel ma zeot aben tri dez
Da vit Doue da repos en gloar ar barados.

Honne eo ar succession a dleac'h-hu da gaout,
Evel ma meus deoc'h lavaret, da Zoue e zoc'h eur güir
vignon,

O soulaji ar beorien guèz e zeot davitàn soudan.

Pa voa achuet o parlant gant eur vodesti ar c'haera,
E bizach carguet a joa evel an heol a zeuas brillant

E güiscamant caër meurbet, an oll a voa sonezet.

Eur c'houez an excellanta a laqas ebars an ty ;
Meulet raviot, Mari, eürus bras eo tud an ty-mâñ
O velet ar vajeste ouz a Jesus Mab Doze.

En instant e voa anavezet, Jesus hon roue guirion
A roas e venedicion da guement voa assemblent,
E presanç ar gompagnuez e pign en eñ gant an Aëles.

An den-mâ a voa qen estonet gant quez d'ar Verc'hez
Vari,

Mantret e galon, ne ell moi pa zònj piou en doa güelet,
Crial rè epad an nôs : Mari, va c'hassit ganeoc'h.

Antronos vintin e varvas an den zantel eürus-mâ,
E ene gant calz a joa a ya da velet hor Zalver,
Etredaouarnar Verc'hez sacr, p'en devoa dalc'hete Mab.

E bried hac et vugale gant laouenidiguez bras,
O deus batisset var ar plaçeur chapet da Vam hon Doue :
Ar Verc'hez a drogare a invoquer ar plaçeur.

Eun nombr bras a viraclou a ra er plaç sautel-mâñ,
Qement a ya d'he bisita, oll e recevout e graçou :
Meulomp Jesus, roue an tron, ha Mari e Vam güirion.

Didostaïteta, christenien, güir tud devot d'ar Verc'hez,
Deut da recita bemdez ar chapeled e c'hurunen,
Grêta bemzec bojet ros fleuriissant er Barados.

O Rouanez ar güerc'hezet ha güir Vam d'an Doue Béo,
Pedit ato evidomp evit ma vezamp pardonet,
Ma ellimp mont da repos ha d'ho meuli er Barados.

FIN.

E Montroulez, e ty LÉDAN, fu ar Pave.